



DROUG-OBER

A ENEP BUEZ AR ROUE;

Ar 16 a vis Ebrel 1846.

BREIZIS! güir gristenien, savomp hor d'halonou
Leun a anaoudeguez varzu Mestr an **Érvou**;
Trugarecaomp-én, lacomp hon esperanc
Er C'hrouer souverén, Protectour eus **iar Franc**;
Dre viracl ar brassa, brec'h galloudec Doue
En deus c'hoas savetét e vuez d'ar **Baye**!

Eur c'hef eus an ifern a zo en em gavet,
Possedet gant Satan, e galon counnaret :
Ar C'homit eo e hano d'an den milliguet-se,
En preiz d'an drouc-speret, den garo, didrue.
Guedal rê ar moment ma teuje da dremen
Ar Roue, e famill, a voa ét da bourmen.
Qerqent ma voent tostét, oll en o charaban,
An den cris a leusqas varnezo daou daol tan....
Ar plom e meur a blaç zo er char antreet,
Mes ar famill royal n'e deveus drouc abet.
Ar bour, c'heas entanet, saillet dre nerz an tenn,
Zo, gant ar Rouanez, cavet var he barlen;
Spouronet evit güir, e crèn vit ar Roue;
Mes n'en deveus nep drouc, a drugare Doue.
— « N'ho pet nep aoun, firon, emec'h, tranquil bras :
» Doue zo evidomp, evit er güelit c'heas »


O Providanç divin ! ouz em torlet qer cris,
C'houi deu da savetât Mab Hena an Ilis !

Ar muntrer counnaret a glasq qemer an tec'h ;
Redec a rêr varnân.... Trappet eo dre e vrec'h.
Neuze, leun a strach, e glasq en em difen ;
Hac eo gant calz a bon ec'h eljet dont a bona
D'en discar, d'en laqat en eur stat n'alle qet,
En despet d'e furor, ober mui drouc abet.
An deiz varlerc'h e voe dastumat er prison.
Da zepord prononci e gadaonacion.



Güelit eta, Breizis, penos eo ar Roue,
Dre wir miracl atao diwoallet gant Doue!
Niveri rër brêmân eiz eus a vuntreien
O deus clasqet laza Roue ar Francisien :
Bergeron, Fieschi, Alibaud, Qenisset,
Darmès, Hebert, Mennier, ar C'homt eo an eizvet;
Mes atao dorn Doue a deu d'en preservi
Eus counnar an dud fall, criminal hac impi.

Trugarecaomp oll hirio ar Brovidañç,
A evessa atao var rouantelez Franç;
Bezomp anaoudec mad a vadelez Doue,
Ha criomp a galon : RA VEVO AR ROUE!



E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.